



DESKIÑ KONTAÑ MARVAILHOÚ

Eil sizhun

Buhezourien

- Daniel CARRE
- William LANDIN
- Fanny CHAUFFIN
- Alan TUDORET

Evit

Tud oc'h ober war-dro bugale, krennarded... (kerent, skolaerien / skolaerezed divyezhek...), stummerien / stummerezed er stummadurioù hir; tud o labourat gant an dud war an oad (buhezourien, klañdiourien...); an neb a zo dedennet gant an dañvez.

Palioù

- Deskiñ kontañ en ur mod hengounel,
- Kompren nerzh an hengoun dre glevet,
- Bezañ gouest da gontañ un istor dirak an holl,
- Lakaat ar vugale, pe ar stajidi (er stummadurioù hir) da gontañ an istor dre glevet,
- Selaou doareoù brezhoneg a-bep seurt,
- Kompren donoc'h ar sevenadur en deus maget ar c'hontadennoù hengounel ha pouez treuskas an hengoun dre glevet e brezhoneg,
- Sevel ur roll kontadennoù.

Pazennoù

Devezh 1

Kompren nerzh an hengoun dre glevet : kontañ un istor berr dirak an holl,
Ober anaoudegezh gant doareoù disheñvel da gontañ evit lakaat ar vugale/an dud gour da gontañ war skouer Albert Poulain ha Suzy Platiel,
Kontañ un istor hiroc'h e mod chadenn,
Kontañ e-barzh ar strolladoù-all e fin an abardez.

Devezh 2

Kontañ gant Daniel Carré,
Brezhoneg ar c'hontadennoù : ur vammenn a-fet yezh evit hiriv.

Devezh 3

Mintin

Labour war Dastum.

Sevel ur gontadenn diwar ur skrid. Labour war dastumad Yann Fañch Kemener.

Abardaez : Atelieroù

Hengoun dre glevet: Troioù lavar, divinadoù, galv ar gontadenn,

Fiziañs, al leurenn, arz ar gaou,

Kontañ en dachenn gampi gant bugale ar greizenn dudi.

Devezh 4

Mintin

Kontañ er maez,

Kemer perzh e-barzh Skolig al louarn, ober anaoudegezh gant an dud,

Kontañ er maez, implijout al lec'h hag ar publik evit diorren arz al liamm,

Abardaez

Kontañ gant Alan Tudoret,

Sevenadur ar brezhoneg er c'hontadennoù (Doare Bro Dreger).

Devezh 5

Mintin

Kontañ d'ar vugale ha ganto.

Ar « repertoire » hervez an oad. Mont da gontañ er strolladoù : Brezhoneg er familh, kreizenn dudi ha gant ar grennarded.

Lakaat ar vugale da gontañ.

Abardaez

Beilhadeg vras. Digor d'an holl.

Devezh 6

Fin ar staj.